

8N2-1-040

KANTIK

en enor da "ZANTEZ NONN"


(Patronen Dirinon)

IMPRIMATUR

Quimper, le 21 Janvier 1928

P. JONCOUR

V. G.



— DISKAN —

Kanomp, kanomp a greiz kalon
 Meuleudiou da Zantez nonn
 Ha goulennomp dre ar beden } (bis).
 Euz e vennoz an aluzen.

— I —

Evit beza oll da Zoue
 Evit trec'hi ar vanite
 Na petra euz-hu gouzanvet } (bis).
 En o kalon, en o spered.



— II —

Gant eun dousder leun a-respet
Ho pugelik o peuz savet
Eun ene gwen 'vel al lili
O peuz great d'ho mab Sant Divy.

— III —

Ho komzou flour, 'vel gliz an Env
A zaoure mad var e ene,
Hag e plaz grichou ar pec'hed
Ar vertuchou o deuz bleuniet.

— IV —

Santez Nonn zo brema uhel
E mesk ar Zent hag an Elez
Gant kurunen ar Zantelez.

— V —

Gouel ar pardon, gouel a enor
Gouel a joa, e Bro Arvor,
En deiz hirio, e trid kalon
Oll Barissioniz Dirinon.

— VI —

Euz barr an Env, o Santez Nonn,
Bennigit parrez Dirinon
O kana deoc'h meuleudiou
Gant e c'halon hag e mouechou.

— VII —

Grit ma chomo grichou ar feiz
E kalon o parrissioniz
Evel grichou ar guez dero
A zivoan var douar or Bro.

— VIII —

D'an tad, d'ar vam, roit guir goulou
Roit d'eo sikour en ezommou
Evit hentcha o bugale
Gant Karantez varzhu Doue.

— IX —

D'an dud iaouank roit furnez
D'ar re vihan, sentidigez
Ha d'ar re goz, kalon nerzuz
'Vit divoaska buez poaniuz.

— X —

Ho relegou a zo ama
En arc'hed euz ar skedussa
Ha dirazho' doug or buez
Ni a bedo 'vit or parrez.

— XI —

Ha gant sikour o pedennou
Digorrit deomp dor an Envou
Ha ni gano deoc'h mil bennoz
E kreiz dudi ar Baradoz.